

— 5 —



GUERZ

VAR SUJET DISTRO UN DEN YAOUANQ

PARTIET GANT AR GUENTA REGISITION.

Var ton : Va Flaneden zo caled.

TOSTAIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true
 Quz ar blandeden bonner a boez var va bue;
 Deut da guemesq ho taelou assambles gant va re,
 Da zoulaji va foanniou, deut da voela varne.

Cetu deg vloas tremenet ma zòn bet contraignet
 D'abandoni va c'herent, va doug, va mignonet,
 Evit monet d'ar brezel da zouguen an armo
 E faveur al liberte voa prometet d'am bro.

Abaoue qeit all amzer, n'alfen qet lavaret
 Pet combat ha pet poanniou a meus-me anduret.
 Tri c'hant leo am separe eus va c'herent nessa,
 Ha na meus bet diouto qêlou an distêra.

E creiz ar c'harnach bemde va buez exposet,
 Unan demeus va diou vrec'h erfin a meus collet,
 Hac evit oll recompanç e meus bet va c'honje,
 Hep receo nep pansion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilezel servich ar Republik,
 N'en deo qet deut va speret da gompren er fatiq
 Eus an hent hir ha poannius am boa-me da ober
 Aroc!guelet va zud qêr hac êruout er guêr.

Collet e meus ar gallout da rêi sicour d'am zad,
 Hac o tivoeret va brec'h, n'allin mui labourat.
 Brêmâ va zud am mago, pa meus-me c'hoas ar chanç
 M'o deus leye hac arc'hant ebars en abundanç.

— 6 —

Cetu me dija êru tostic demeus ar guêr ;
 Gant ar joa ouz va güelet an oll a ray dîn cher ,
 Va zad , va mam , va c'herent , breudeur ha c'hoarezet ,
 Ha va mestrezic fidel a vo oll ravisset.

Bonjour dec'h , ô va c'hontre ! eurus en em gavân
 Gallout c'hoas ho contempli , dont da vervel amân.
 Va c'halon gant ar joa vras em c'hreiz zo seziet
 O tostat demeus an ty el lec'h m'ôn bet ganet.

Mes , oc'h antreal enni , e zôn bet trubuillet ,
 Un den dianav dîn-me en deus dîn lavaret :
 Eruet fall oc'h amân ; sortiit , va mignon ;
 Ne mâ qet ar mestr er guêr , n'ho po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini
 Touez qenlies personach a voa o rên en ty ,
 E meus-me prest respontet : ententit va rêson ,
 Me n'en don qet deut amâ da glasq an aluzon.

Clasq a rân va c'herent qer er plaç m'ôn bet ganet ;
 Al lec'h-mâ a zo dezo , amâ ôñ bet maguet.
 Lavarit dîn , me ho ped , pelec'h en o c'havin :
 Ne zefot netra qen dîn evit va c'hontantin.

An den-mâ a zo follet , int commancet crial :
 N'en de qet mab d'hor mestr-ni ; ret eo er chasseal.
 Güelet ho pije neuze eur vanden mevellyen
 O tiredec gant bizier d'am chasseal souden.

O sortial gant glac'har ha beuzet em daelou ,
 Da glasq va zud elec'h all , pe clêvet o c'hêlou ,
 En hent e zôn bet scôet vel gant eun tol curun ,
 Pa meus-me anaveet voa collet hor fortun.

Souden e meus rancontret va c'hoar ar yaouanqa ,
 Eur zac'hic staguet outi , o c'houlén e bara.
 O clasq compren ar maleur varnomp-ni digüezet ,
 Va speret zo bet troublet , ha va c'halou mantret.

O Doue oll-buissant ! roit dîn hoc'h asistanc ,
 Roit dîn an nerz da glêvet penos ho Providanc

— 7 —

E devezs bet permetet, evit va c'hastia,
Ma zomp-ni bet reduiset er stat an horrupla !

Va c'hoaric paour, me ho ped, soulajit va mizer;
Hast bras a meus da glêvet qêlou deus va zad qer,
Hac eus ar vamic tener e devezs hor savet :
Mervel a rân en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuric paour ! ne oufes qet compren
Peguen bras eo hor maleur, peguer bras hon anqen...
Allas ! ouspen hor madou a renqomp divoeret :
Hor c'herent carantezus zo bet deomp ravisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,
Hon tad voa chommet fidel d'an Ilis Catholig;
Rac-se gant an tirantet e zeo bet condaonet
Da bignat var ar chaffot vit beza dibennet

Prestic goude, hor madou a zo bet confisqet,
Hac ive, prestic goude, siouas ! int bet guerzet.
Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo,
Hor mam a zo bet neuze scôet gant ar maro.

Cessit, va c'hoar, da barlant; cessit d'am dezoli,
Re a meus var an douar a dourmant hac anui,
Er moment mac'h esperen commanç beva eurus,
En em gavân, va Doue ! muyoc'h-muy maleurus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat,
E deus, d'am recompanci, guillotinet va zad,
Laqet va mam da vervel dre nerz an dizesper,
Ha gûerzet va oll vadou ; n'em bo nemet mizer.

Diouz an tourmantchou garo a stourm ous va speret,
Pelec'h caout soulajamant, pelec'h cavet remed ?
Ar plac'h e deus captivet a bel va zantimant
A zoulajo va hirvoud gant e c'homzou charmant.

Varzu ty va mestrezic e zân gant esperanç
Caout en e fidelite remed eus va zouffranç :
Bonjour déc'h, va rouanez ; cetu me deut er vro :
Ancouët eo va oll boanniou, mar am c'harit atao.

— 8 —

Me zo FANCHIC, ho mignon, distro ens ar brezel,
 Hac a so en peb amzer chommet d'ec'h-u fidel,
 Demeus va oll garantez ebars en hoc'h andret
 E meus brêma esperanç beza recompancet.

Petra, paour q'ez reuzeudic! clasqit-u em c'hever?
 Biscoas ne meus ho q'uelet, na deziret ober;
 Biscoas ne meus ho caret, na birviquen n'er gràn,
 Ha cetu, en h'er gomzou, ho setanç diveza.

Me zo an den maleurus, ne gafet qet e bar.
 Mil guech milliguet an heur m'on deut var an douar!
 Oll gouliou va c'halon zo nêve digoret,
 O veza bet rebutet gant va muya caret.

Va mestrez ouz va g'uelet couezet en paourente,
 Nijet e fromessaou, nijet e c'harante.
 Esperanç va eurstet, allas! zo tremenet
 Evel ma ra un ure en n'os dre hor speret.

An exempl-mâ, tud yaouanq, a deu d'oc'h instrui
 Peguen dister ar bed-mâ, leun a ingrateri;
 Epad ma zoc'h pinvidiq, gant an oll oc'h caret;
 Mes mar tro rod ar fortuu.... adieu ar mignonet!

Petra rân var an douar? collet va mam, va zad,
 Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat:
 O vervel pe o veva er c'hoad gant al loened,
 R'n guell eguet implori amâ faus mignonet.

Er c'hoajou an tevella o tont d'en em guzat,
 Maguet vin gant va glac'har, hac eus va daoulagad
 E tredo an daelou da drec'hi va zec'hed,
 Betec ar moment eurus ma quittain ar bed.

En despet d'an injustiç a eprouvân hirio,
 Ma bedo a greiz calon evit boneur va brô:
 O va Doue! deurvezit renta, dre ho puissanç,
 Ar bonneur, al liberie d'am h'ir g'uet eus a Franç.

FIN.

E Montroulez, e ty A. LÉDAN, ru Pont-an-Iron-Varia.

